

BARZONEK,

EN ENOR

DA

LA TOUR-D'Auvergn,

QENTA GRENAIER A FRANÇ,

EVIT BEZA CANET E KÆR-AHÉS, DEIZ LID STATU AN HAROS,
AR 27 A EVEN 1841, EUR BLOA HA DAOU-UGUENT GOUDE E VARO.

Var ton : *Deomp oll, bugale qenvrois.*

SALUD, ô Haros bras Breiz-Izel,

LA TOUR-D'Auvergn, scoüer ar vaillanç,

Te pini a voe atao fidel

D'ar bannier sac'r demeus ar Franç!

(2 vech.)

Sell diouzomp diouz lein an ênvou

Amâ oll etal da imach,

O renta did hor güir hommach

Hac ouz da veuli dre hor moueziou.....

Gloar da **LA TOUR-D'Auvergn,** scoüer eus ar güir vaillanç!

Breizis! Breizis! celebromp oll Qenta Grenadier Franç!

Seitec vloas ha pèvar-uguent zo
 Kær-Ahés a velas guenel
 An Haros bras a veulomp hirio ,
 Vaillante den a Vreiz-Izel. (2 vech.)
 En deiz-mâ , ni , Armoricanet ,
 Dirac an den ar vaillante ,
 Toùomp da veza dign ountâ ,
 Rac ni ivez e Breiz omp ganet. Gloar , etc.

A hoan a bemzec vloas voe oajet ,
 Ma sant e galon o sailla :
 Goad Turen' red en e voaziet ;
 Birvi a ra d'en imita. (2 vech.)
 Redec a ra vit en em vesca
 Etouez hor zoudarded vaillant ;
 Atao e penn e rejimant ,
 Netra na ell ountâ resista. Gloar , etc.

Mes ar seiz varnugent a even ,
 Ebars er bloaves mil eiz cant ,
 Er penn demeus e c'hrenadourien
 Pa gombatte en den vaillant , (2 vech.)
 E creiz ar c'harnach eus ar goassa
 E voe lazet gant un tol lanc

Ar C'henta Grenadier a Franç ,
Un haros demeus ar re vrassa....
O devez a c'hlac'har hac a gaon er Franç oll !!!...
Breizis ! Breizis ! e c'hloar heppen hor c'honsol'eus e goll.

Eur seurt maro voa dign diountâ ,
Pegument m'eo meurbed garo ,
Rac n'eus qet caeroc'h fin er bed-mâ
Eguet mervel vit ar vam-bro. (2 vech.)
Coueza' ra evel ur güir haros ,
En eur gombatti gant ardor :
Maro eo er C'hamp-a-Enor ;
En ênv e mâ brêmâ o repos. Gloar, etc.

O veuli hon Haros en deiz-mâ ,
E veulomp an oll vertuziou ,
Rac oll e voant unanet ennâ :
Ên eo Haros an oll vroyou. (2 vech.)
Lealded , furnez ha vaillantis
A gargue bepret e galon ;
Beza voa scoüer da bep Breton ;
Criomp eta , coziad , yaouanqis : Gloar, etc.

Carantez sacr demeus hor mam-bro ,
Cundu ha harp brec'h peb Breton ,

Ha gra ma en devezo ato
Courach hon Haros er galon. (2 vech.)
Scrifomp bepret var hor guitonou :
LA TOUR-D'Auvergn, Breiz-Izel, Franç,
Hanoyou leun eus a vaillanç,
Hac a ray tridal ar galonou. Gloar, etc.

Ah ! ra vezo an devez caer-mâ
Gravet atao en hor memor,
Vit ellout d'hor bugale conta
An hommach rentet d'an enor. (2 vech.)
O clêvet fêjou an den vaillant,
E tisqint dont d'en imita,
Evit un deiz ellout beza
Eveltàn leun a gourach ardent.

Gloar da LA TOUR-D'Auvergn, scoüer eus ar güir vaillanç !
Breizis ! Breizis ! celebromp oll Qenta Grenadier Franç !

A. LEDAN.

